

Lodenn 2: ar vuhez demokratel

Tem 1: ar vuhez politikel

I. An destenn-diazez pennañ : Bonreizh ar Vvet Republik e 1958

-Bonreizh: hollad an testennoù-diazez àr aozadur ha mont en-dro ar Republik hag a verk gwirioù ha dleadoù he c'heodediz.

- **Riegezh ar bobl** get ar vouezhiadeg hollek hag ar referendum: ar galloud politikel d'ar vroad (d'ar geodediz).
- **Mouzhiadeg hollek**: doare mouezhiñ digor d'an holl geodediz perc'henn àr o gwirioù keodedel
- **Referendum**: goulennet e vez get ar bobl roiñ hec'h ali dre vouezhiadeg hollek diàr-benn degemer pe kemm ar Vonreizh. Respontet e vez ya pe ket.

II. Disparti ar galloudoù(mennozh Montesquieu)

Republik: diàr al latin res publica=an dra foran, tra ar bobl): renad politikel e-lec'h ma vez sevenet ar galloud get ar bobl pe dre hanterouriezh kannaded anvet geti.

Gwarezour an aozadurioù politikel eo Prezidant ar Republik.

Ur renad demokratel eo ar Republik c'hall hag e vez ar riegezh d'ar bobl.

Ar galloud seveniñ (lakaat e-pleustr ar lezennoù) a vez da Prezidant ar Republik hag ar gouarnamant renet get ar 1añ Ministr.

Ar galloud barnel(lakaat da vout doujet ar lezennoù) a vez e daouarn barnerien dizalc'h.


Ar galloud lezenniñ(sevel ha votiñ ar lezennoù)a vez d'ar Parlamant (Bodadenn Vroadel ha Sened)

Deiziadoù pouezus:

1958: Bonreizh ar Vvet Republik:

1901: lezenn àr ar c'hevredigezhioù

1884: lezenn Waldeck-Rousseau àr ar frankiz kevrediñ (sindikadoù)



Kuzul Bonreizhel:

An aozadur-mañ a zo bet krouet get ar Vonreizh e 1958.

Gwiriekaat a ra an emglevioù etrevroadel ha reizhded ar lezennoù mard ne yant ket enep d'ar Vonreizh.

Kontrolliñ a ra dilennadegoù Prezidant ar Republik hag ar barlamenterien (deputeed ha senatored).

9 ezel a zo.

Valeri Nicolas

III. Aozadur ar galloudoù

A. Ar galloud seveniñ :

Prezidant ar Republik

Dilennet eo prezidant ar Republik evit 5 dre vouezhiadeg hollek eeun abaoe 1962. E sez a zo e **Palez an Elysée**.

E-penn ar Stad eo. Gwarantiñ a ra-eñ ar Vonreizh,

Emañ dezhañ e-unan galloudoù:

-Anvel a ra-eñ ar C’hentañ Ministr. mellad 8

-Gwir en deus da c’houlenn ur referendum mellad 11

-Divodiñ ar Vodadenn vroadel mellad 12

Ren a ra ar bolitikerezh estren hag e vez e-penn an armeoù,(mellad 15). diviz a ra implj an arm nukleel.

E-penn Kuzul ar Vinistred emañ , deiziet pep merc’her da vintin e palez an Elysée. Embann a ra al lezennoù

Gellet a ra sevel ar c’hastizoù mellad 17.

Ar gouarnamant

Dibabet eo e-kreiz an tu gounit parlamantel get Prezidant ar Republik. Emañ ar sez e **palez Matignon**.

E gefridi:

-Ren a ra ar C’hentañ Ministr politikerezh ar vro

-Dibab obererezh ar gouarnamant.

Emañ e-penn ar velestradurezh hag a lakaa e-pleustr ar lezennoù(galloud seveniñ). Dibabet e vez ar Vinistred get harp Prezidant ar Republik.

Prientiñ a ra ar raktresoù-lezenn e vo roet da lenn d’ar parlamant. Gellet a ra ivez kemer divizoù hep tremen dre ar parlamant dre dekredoù, ordronañsoù.

Kiriek eo ar Chentañ Ministr doc’h obererezh e c’houarnamant dirak ar Vodadenn . Gellet a ra an deputeed tenniñ dezhañ ar fiziañs dre ur mennad-disfiz. Ma vez muioc’h evit an hanter a vot ya d’ar mennad-se e rank ar C’hentañ Ministr roiñ e zilez.

Valeri Nicolas

B. Ar galloud lezenniñ: AR PARLAMANT

Ar Vodadenn vroadel

577 depute int.

Rannet eo Frañs e pastelloù-bro e lec’h e vez dilennet an deputeed dre vouezhiadeg hollek evit 5 blez hervez ar votateg muiañ niver divdro.

Emañ o sez er **Palez Bourbon** .

Pennañ labour evit an deputeed eo: prientiñ, tabutal ha votiñ ar lezennoù. Dasparzhet eo o c’halloud get ar senatored. Digor eo an abadennoù hag an tabutoù e vez embannet er Journal ofisiel.

Gellet a ra ar parlamanterien kinnig lezennoù: anvet kinnigoù-lezenn. Votiñ a rant ur lezenn arc’hant evit budjed ar Stad.

Kontrolliñ a ra ivez ar gouarnamant. Gellet a ra ar parlamant skarzhiñ ar gouarnamant en ur nac’hiñ e fiziañs pe votiñ ur mennad disfiz.

Ma vez an disemglev padus etre ar Vodadenn Vroadel hag ar Sened evit votateg ur lezenn e vez bepred get ar Vodadenn vroadel ar ger diwezhañ peogwir e reprezant-hi war-eeun ar geodediz.

Ar Sened

Reprezantiñ a ra ar Sened ar strollegezhioù tiriadel. N’eo ket dilennet ar senatored àr-eeun get ar geodediz met get elektourien veur **dre vouezhiadeg hollek ameeun**.

Reprezantiñ a ra an elektourien veur ar guzulierien tier-kêr, kuzulierien veur,rannvro hag an deputeed. Dilenn a rant un dredrerenn ag ar senatored pep tri blez.

Dilennet e vez ar senatored evit 9 blez hag ar sez a zo ar **Palez Luxembourg**. 348 senator ez eus er Sened. Gellet a rant kinnig ur lezenn(60 senator d’an nebeutañ), tabutal; votiñ a rant ar raktresoù-lezenn kinniget get ar gouarnamant hag é tont ag ar vodadenn vroadel.

Gwarantiñ a ra prezidant ar Sened mont en-dro ar Stad ma varv pe mard eo ampechet prezidant ar Republik.

Hent al lezenn

-Dont a ra an intrudu da sevel ul lezenn nevez (mennozh da sevel ur lezenn) ag ar parlamanterien (**kinnig-lezenn**) pe ar gouarnamant(**danvez-lezenn**) .

-Studiet eo ar lezenn get ur c'homision a stroll ennañ parlamanterien hag a sav ur rentañ-kont. Anvet eo an **daneveller**. Goude ez eus cheñchamentoù anvet **kemmenadennoù** a c'hell bout kinniget.

Burutellet e vez, tabutet e vez ar lezenn e-kerzh emvodoù boutin ar Vodadenn Vroadel ha votet e vez.

-Kaset e vez àr-lerc'h an destenn er vodadenn arall , er Sened hag a c'hell nac'hiñ, kemm. Krogiñ a ra ar **monedone**. etre an div Vodadenn .

Ma chom dizemglev etre an div vodadenn àr-lerc'h daou monedone, e c'hell ar gouarnamant goulenn sevel ur c'homision kemmesk àr hanter hag a stroll deputed ha senatored. Pal dezhe eo kavout un emglev. **Ar ger diwezhañ** e vez bepred roet d'ar Vodadenn.

-Gellet a ra ar senatored pe an deputed pe ar Ministr Kentañ goulenn ali diget **ar C'huzul Bonreizhel** . Nav ezel anvet evit nav blez a zo ennañ: Gellet a ra nac'hiñ ur lezenn ma ne zouj ket doc'h ar Vonreizh.

-**Embann** a ra Prezidant ar Republik ar lezenn edan 15 deiz er **Gazetenn ofisiel**. Lakaet e vez e-pleustr àr-lerc'h bout embannet dekredoù arverin al lezenn.

IV. An digreizennadur: rol ar strollegezhioù tiriadel

-E 1982-1983 (ha goude 2003) ,**al lezennoù digreizennadur** o deus rannet galloudoù ar **Stad-kreiz**(ar gouarnamant) hag ar **strollegezhioù tiriadel**. Pal d'ar lezennoù-mañ eo **bout tostoc'h doc'h ezhommoù ar geodediz**. Gellet a rant ar re-se diviz tra mañ tra hag o deus o budjed dezhe edan evezh ar peref(anvet get Prezidant ar Republik).

-**Ar strollegezhioù tiriadel: rannvroioù, departamantoù ha kumunoù.**

Valeri Nicolas

Pep strollegezh tiriadel e vez renet get ur velestradurezh ha get ur c'huzul dilennet get ar geodediz: **Kuzul kêr** evit ar c'humun, **kuzul meur** evit an departamant ha **kuzul rannvro** evit ar rannvro.

Ur c'huzul dilennet ez eus evit pep hani. Gouzout a rant muioc'h ezhommoù an annezidi dre mard int tostoc'h doc'hte

Kefridioù: petra a rant?	36680 kumun Kuzul-kêr dilennet evit 6 vlez a zilenn ar maer	101 departamant Kuzul Meur dilennet evit 6 vlez a zilenn prezidant ar C'huzul Meur	27 rannvro Kuzul rannvro dilennet evit 6 vlez a zilenn Prezidant ar C'huzul rannvro
Deskadurezh	Kempenn ha sevel ar skolioù kentañ derez publik	Kempenn ha sevel ar skolajoù publik	Kempenn ha sevel ar liseoù
Trañsportoù-aveadurioù	Kempenn hentoù ar c'humun(C)	Kempenn hentoù an departamant (D) Trañsportoù skol	TER
Obererezh sokial	CCAS centre communal d'aide sociale	RSA	Yec'hed, aide social à l'enfance, aide aux handicapés
Traoù arall	Polis kêrel	Ober àr-dro ar levraoueg departmantel	Skoazell evit ar sport Stummadur micherel

V. Ar geodediz hag o c'hemer perzh demokratel

Kemer perzh en ur strollad politikel .ar strolladoù politikel e-kreiz an tabut demokratel

Ur strollad politikel: ur strollad tud get an hevelep mennozhioù politikel diàr-benn mont en-dro ar gevredigezh. Pal dezhañ eo bout trec'h en dilennadegoù a-benn lakaat e-pleustr o mennozhioù.

Liesegezh ar strolladoù politikel: diazez an demokratelezh

E Frañs ez eus meur a strollad politikel (tro 200) get a bep seurt mennozhioù.

Niverus int ag an tu kleiz pellañ betek an tu dehoù pellañ: diskouez a ra liesegezh mennozhioù ar geodediz . Magiñ a ra an tabut get mennozhioù a bep seurt ha pep keodedad a c'hell sevel e sav-poent personel.



Elektour
 Votiñ evit
 dilennadegoù:
 Prezidant ar
 Republik
 Deputeed
 Rannvro
 Kanton
 Ti-kêr
 Europa
 Hag ar
 referendum

Stourmer
 a gemer perzh er
 strolladoù politikel é
 pegiñ skritelloù, é
 kemer
 perzh en emvodoù, é
 heuliiñ ar c'hannad er
 meeting

keodedad

Kuzulier
 er c'huzul karterioù
 Kuzul skolaj
 Tabutoù bras
 foran(Grenelle de
 l'environnement)

Dilennet
 Pep
 keodedad
 a-us da 18
 vlez ha get
 ar
 vroadelezh
 gall a
 c'hell bout
 dilennet

Kemer perzh en ur gevredigezh

Kevredigezh: hollad tud liammet kenetreze a-benn lakaat a-gevred o obererezhioù.
 Renet eo ar c'hevredigezhioù get ar frankiz kevrediñ, lezenn 1901.Ret eo dezhe bout disklêriet en ti-prefed.

Ret eo dezhe bout **hep pal kenwerzhel.**

Ur milion a gevredigezhioù ez eus e Frañs e-barzh a bep seurt dachenn:

- * difenn frankizoù ha gwirioù mab-den (LICRA, SOS racisme)
 - * sportivel: ASSE..
 - * sokial: restos du cœur, secours populaire
 - * Dastum argant evit ar yec'hed hag an enklask: sidaction, telethon
 - * difenn ar vevezerien hag an endro:Greenpeace,
- 2 vilion a dud a labour er c'hevredigezhioù hag ivez dek million a dud **a youl vat.**

Budjed ar c'hevredigezhioù a za ag ar skodennoù an izili, ar skoazelloù publik(ti-kêr, kuzul meur, Europa...) hag ivez donezioù.

Ur lobby eo ur **stroll poueziñ** a klask levezoniñ ar lezennoù, ar reolennoù, an normoù industriel da skouer n an divizoù... a-benn favoriziñ e interestoù dezhe, ekonomikel , meur. Gwaskiñ a rant ar re dilennet get bruderezh, sinadegoù pe ar mediaoù.

Da skouer: ar re a sav an otoioù, ar re a ra ar butun enep ar re evit un endro padus..

Kemer perzh en ur sindikad:
Liesegezh ar sindikadoù

Ur sindikad: kevredad tud unanet e-sell da zifenn o interestoù boutin,michernel peurliesañ: kresk ar goproù, digresk niver a euriadoù labour...Kemer a rant perzh e-barzh goulennoù sokial. Get ar ger-se e vez graet dreist-holl ag ar c'hevredadoù micherourien a stroll sindikadoù.

5 sindikad e vez anaouet :[CGT](#), [CFDT](#), [FO](#), [CFTC](#) ha [CFE-CGC](#)).

Ar batoned a zo reprezantet get ar MEDEF(Muvement des entreprises de France) abaoe 1998.

Abaoe **1884** eo bet krouet ar sindikadoù. Anaouet eo er Vonreizh.

VI. Liesegezh ar mediaoù ha rol ar mediaoù

A. Ar frankiz disklêriñ e veno : ur gwir pennañ.

-Ar frankiz disklêriñ e veno, èl ar frankiz koustiañs(relijion,,) ar frankiz embann a **vez diazez ar renad demokratel**. Liammet eo get **frankiz ar mediaoù, ar c'heleier** , ar radioù, ar genrouedad.

Diazezoù gwirioù ar mab-den eo ar **gwir titouriñ , ar gwir reseviñ, kas titouroù ha mennozhioù** .

-Pouezus eo ar mediaoù, meur a wech anvet ar « **4vet galloud** », ur galloud karget da evezhiñ, da vurutellat ar galloudoù arall(seveniñ, lezenniñ, barnel).

-Diazez un demokratelezh eo **liesegezh ar mediaoù** evit **kemenn, eskemm, titouriñ**.

B. Ar frankiz embann a c'hell bout en arvar pe nagennet.

E-barzh leun a stadoù ne vez ket doujet doc'hti. Edan evezh ar galloudoù strizh relijiel pe politikel eo ar frankiz embann, skriviñ; An hanter ag an 192 Stad en ABU ne zoujant ket d'ar frankizoù-mañ. En Aljeria ez eus bet 60 kazetenner drouklahzet abaoe 1993.

Dont a ra da vout **ur benveg propaganda** an titouriñ nann dieub. Emañ benveg an diktaturiezhioù a-benn skignañ mennozhioù er c'hazetennoù, traktoù, skritelloù, filmoù, radioù.

C. Ar meno foran hag ar mediaoù.

-Hiviz-an-deiz ar **frankiz disklêriñ e veno** hag ar **frankiz kaout titouroù** a zo diazezoù pennañ peogwir e c'hell d'ar geodediz kompren an darvoudoù, sevel o meno, sevel o sav-poent , burutellat. Er gevredigezh e vez leun a zoaroù a-benn skignañ hag enrolliñ titouroù a bep seurt é tonet a bep tu ag ar c'hevandirioù: **ar c'heleier a-stroll eo** : . Dastumet e veze an titouroù-mañ get ajañsoù-kelaouiñ hag adstummet, labouret get ar mediaoù. Ar re-se a implij a bep seurt doareoù a-benn skignañ anezhe : radio, kenrouedad, kelaouennoù, kazetennoù.

-**Tro-spered al lodenn** vras ag ar boblañs e vez anvet **ar meno foran** : savet e vez ar meno foran get sav-poentoù kaset get kedodediz àr ar goulennoù dre vras.

D. Penaos en em stumm ar meno foran ?

-Depend a ra eus live anaouzegezh ar c'heodedad àr un sujed roet. Rol ar mediaoù eo roiñ da bep keodedad titouroù sur ha liesseurt evit ma c'hellehe ar geodediz sevel o sav-poent poellek hag arguzennet. En tu kontrell, pa ne vez ket a ditouroù, **ar meno foran a chom termenet àr ar gounnar, ar vrud** hag a c'hellay bout daouornet. Levezon a ra ar mediaoù an doare da soñjal en ur ginnig an traoù .**Ur galloud pouezus e vez get ar mediaoù**.

E. Bevennoù ar frankiz

-Disklêriñ e veno e vez reolenet get al lezennoù, hini ar 1 a viz **Gouere 1881 àr ar frankiz kelaouiñ**. Gwareziñ a ra ar geodediz enep d'an **droukimplijoù(titouroù faos, mezhus, geveier, gwall vrudiñ...)** pe gwalliñ ar vuhez prevez.

-Ar gazetennerien o deus **kodoù, reolennoù dezhe**, anvet **an dleoniezh**(reolennoù micherel) strollet e-barzh karta Munich 1970 èl doujiñ doc'h ar gwirionez, doc'h ar frankiz kelaouiñ , embann nemet pa vez gouiet orin an titouroù.

-E Frañs ez eus ar **CSA, Conseil supérieur de l'audiovisuel**, krouet e 1989, a-benn lakaat da zoujiñ doc'h reolennoù-mañ er chadennoù radio ha skinwel hag ivez ar CNIL(**Commission nationale de l'informatique et des libertés**) a-benn doujiñ doc'h an titouroù perosnel àr ar genrouedad.

G. Sondadegoù meno

A-drugarez d'ar **sondadegoù meno** e vez gouiet ar meno foran. Gellet a ra muzuliiñ stad ar meno foran àr ur sujed rekis da vare ur prantad rekis. A bep seurt sondadegoù ez eus àr tachennoù èl ar politkerezh, ar c'heleier

- Un benveg arall eo evit ar geodediz da roiñ o meno met e rank diwall doc'h ar sifroù n'int ket sur penn da benn.